

(333, suite)

Ar c'hleuziou bruguet, ⁽¹⁾
hac an Tour dantelezet.

Var an ton gallec.

(334)

Er Finistèr e zoun bet ganet
Ha Castel-Paol eo va mam-bro;
Ar vrô quella a ouffet c'avet,
Ha caera Tour zo t'eo vandro.
Me o c'harie, me o admire;
Gentlies deiz ro Doue, me lavare:
Me gar va c'hleuziou bruguet,
Va zour dantelezet.

Mes, pa voe rentet din ar c'hêlou
E zoa ret quittat va mestrez,
Ha mont da heuil an tambourinou,
Dilezel tad ha tieguez,
Me meus champet ha lavaret:
Oh! n'antân get! n'antân get! n'antân get!....
Guell eo va c'hleuziou bruguet,
Va zour dantelezet.

Hac e vijeñ-me en em facher?....
Senti d'an urz me a ranqe.
Tud mechant a rê scouarn calet
Oc'h va daêlou, va c'hleñ-mou-me.
Hac e c'hoarzget, e voapaet,
O lavaret: Yronic? n'antân get!
Adieu, va c'hleuziou bruguet,
Va zour dantelezet!

(335)

En despet din-me, er rejimant,

(1). - Er c'hopi genta em boa laget: ar c'hleuz alavret; mes quelloc'h e
cavan ar c'hleuziou bruguet: choazit.

En exerciç, Yvonie paour !
 N'em boa na gout nac ententamant
 D'anaout james droit, demi-tour ;
 Hac e triën evel ma sonjen,
 Dre ma triën, gant an den e clasqen
 Guelet va c'hleuziou bruguet,
 Va zour dantele[ze]t.

Dionc'h ar gamel tam ne brofiten ;
 Treud, qen a guezzen eus va zea,
 O vont varlerc'h ar c'horf me chomme
 Bep cant pas d'en em discui[ze]za,
 Hac e voelen, dre ma sonjen
 Marteze qen birvigen ne veljen,
 Sivoas ! va c'hleuziou bruguet,
 Va zour dantelezet !

« D'ar paotr-mâ n'eus nemet eur remed,
 (Eme 'n doctor) : eur c'honje mad ;
 » Guelit-en etrezec ar vèred
 » E qerz ar c'heaz paour tîmad. »
 Ha great e voe var ar quer-ze ;
 « Dal da gonje ; qea d'ar quear alesse,
 » Da gaout da gleuziou bruguet,
 » Da dour dantelezet. »

(336)

O va brô queaz ! o brô beniquet !
 Cetu me distro en ho creiz !!! ...
 Ra verzo da vigen milliquet
 Ar re am chasfe deus va Breiz !
 O va zad paour ! ô va mam quèz !
 O fantonic ! va anter-tiequez !
 Gloar, gloar d'hor c'hleuziou bruguet !
 D'hon Tour dantelezet !

1841. A. Lédan.

fin.

(Vol. VI, p. 333-336.)
 7 st. numérotées.